

HUVRE JEAN MARI

War Ton : AR ROUE GRALON

1

Kenvrois deuz a Vreiz-vihan,
Mo ped selaouit e war gan.
Me a gounto deoc'h eun huvrez
Reas Jean Mari eun nosvez.

2

En huvre-ze, sonje dezhan
Oa partaget madou'r bed-mañ.
A da bep hini tigoueze,
War dro pewar mille skouet leve.

3

Hella breman ! me Jean Mari,
Ne venko ket netra em zi !
Betek ar fin deuz ma deou,
Me a vevo vel eun aotrou.

Araok reñken zevel ar bed,
Dre bep sort amzer labourad,
Goude kemen a boan benedez
Bewed gand dour a patatez.

5

Er c'hontrel breman e c'helli,
Choum n'em gouele keit ma kari ;
Hag en eur zevel kaout bemde,
Eur banac'hek mad a gafe.

6

En pep-tra hag herve ma c'hoant
Vi servijet pa meuz arc'hant.
Dont a mont en pep liberte,
Pegen brao vo din kaout leve.

7

En dro din, neuz met paourentes
Mes ragtal zan da Voutroules,
D'ober eno provision,
Deuz ar pezh desir ma c'halou.

8

Mes siwas evit mont en kaer,
Meuz met eur brago toul a ber ;
Ma e zan ganthan evel-se,
Kaëris c'houerzo din adare.

9

Dre-ze ta, araok partial,
A gallout prena unan al,
Me c'ha da lakat e ficha,
Da di ar c'hemener nessa.

10

Ar c'hemener da Jean Mari
Na c'houl ober na krav na gri ;
Labourin ken dalek hirie,
Pa meuz pewar mille skouet leve.

11

Ober ra tro ar vilajen,
Vit klask ficha e vragezen.
Mes an holl dezhan respounte :
Dewa pewar mille skouet leve.

12

En despet do c'holl gouaperez,
Me choumi ket en dienez ;
Rag en kaer me zo p'vont breman
Gant va brago evel ma man !

13

Pa zo arc'hant em g'udello,
Boued, dillad, eno ma breno.
Hag hirie vit ar ouerh kenta,
E zin en hôtel da leñia.

14

En kaer eta pa arve
Souezet meurbet e choumas,
En hôtel ma sonje disken,
Oa skrivet warnhi erelhen :

15

« Aman an ti a zo se red,
A boued enañ vo ken gwerzed,
Me hell bewa euz ma danve
Pa meuz pewar mille skouet leve ».

16

War digare da gement-se
Me na iuni ket pad en de !
Rag eur sac'h zur pa ve goullou,
Pell barz e ne za na choumo.

17

Ma na gavan kent a friko,
Bara marvad me a gavo,
E z'an ragtal, n'eur redaden
Da voulangiri da c'houllenn.

18

Dezhan respount ar boulanger :
« Me meuz dilezet va micher,
Biken, bara ken n'a rin-me
Pa meuz pewar mille skouet leve ».

19

Petra ziniti kement-man ?
Gant an holl memez-tra glevan !
Red eo ve aru fin ar bed,
Pa na c'houl den ken labourad.

20

Me sonje din gant ma madou,
Haljen bemde, dibri frikou
Poumen, ober ma didalve
Dre ma em boa breman leve.

21

Diwar va c'houst, siouas tiskañ
Eo fal ar vuez er guis-man,
Hirie vit eur pred me rofe,
Ia, va vewar mille skouet leve.

22

War gement-mañ ar c'hok gannas
A Jean Mari a zifunas,
Neur gompren penaos, ar voyen
Dal netra ep labourerrien.

23

Eur guetel e zeo va huvre,
D'ar ve holl a zo didalve,
Pere bemde c'hoanta beva,
Vel al laer euz poan o nessa.

24

Penaos pep oen war an douar,
A na c'houllenn ket labourad,
Gle ket ken neubeut dibri boued.

25

Nep zo iac'h, a na labour ket,
Zo din da veza meprizet,
Rag mam an holl fallagriez,
E zeo an didalvoudeguez.

26

An holl er bed gle labourad,
Darn a gorf, darn all a spered
Ar labour ro koutantamant
Kalz muioc'h vit aour, pe arc'hant.

27

Neur achui diskomp breman,
Ober oun dever er bed-mañ.
Labouromp oll a galouu vad,
A zur veomp koutant deuz oun stad.

OMNÈS, Yves.